



2017

## Kazetenniñ : Ur sizhunvezh evit ober anaoudegezh gant bed ar radio

Asambles gant animatourien ha kazetennerien Radio Kerne e vo fardet 2 abadenn radio a vo skignet da heul war gwagennoù ar radio. Mont a raio ar skipailh war an dachenn evit atersiñ tud savet e vo pennadoù (kronikennoù) da binvidikaat danvez an abadennoù.

### Tañva teknikoù ar radio :

Komz ouzh ar mikro, prepariñ ha kas da benn un interview, skeudenniñ ur c'helfilm gant ar son, sevel kronikoù, lakaat e plas blenier un abadenn, fardañ ur flash Keleier...

### Deskiñ implijout ar binviji teknik :

Son-enroller, mezialtoù frammañ...

Ma 'z eus kinnigoù kelskrid gant lod (tud eus o familh pe traoù all) gwell a se.

**Ne vo ket kemeret ouzhpenn 10 den er rummad-se. Gwelloc'h eo d'ar stajidi bezañ en o aez gant an urzhiaeterioù.**

	Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener
Mintin	Kinnig ar radio an teknikoù, prog ar sizhun	Prepariñ ar pennadoù kaoz flash keleier	War an dachenn	Atalier sevel blenier abadennoù	Er radio frammañ enrollañ
Goude merenn	Ober strolladoù, divizout peseurt abadenn vo fardet kemer emgavioù	War an dachenn	War an dachenn	Strollad A Frammañ kelskridoù  Strollad B skrivañ Kronikoù	Er radio frammañ enrollañ

### ANV :

Lenet em eus programm ar c'hentelioù **Kazetenniñ – Ober anaoudegezh gant bed ar radio** ha kadarnaat a ran va dibab da heuliañ ar rummad kentelioù-se bemdez, eus 9 eur da 12 eur diouzh ar mintin hag eus 2 eur da 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.